

Ifig TROADEC (Kan / Chant)

2 - An dizertour / *Le déserteur* (Traditionnel)

Ifig Troadec a collecté cette chanson auprès de Cécile Le Coz, âgée de 80 ans, à Locquémeau en janvier 1981.



AN DIZERTOUR

Le déserteur

Gwechall pa oan bihan, bihan en ti ma zad
Me oa ur bugel, ur bugel savet mat

Pa oan-me deuet en oad da dennañ ma bilhed
Setu me partiet da gomañs ma c'horjje

Letanant kabiten a debr ar bara gwenn
Ha me paour kaezh soudard a debr ar bara brenn

Letanant kabiten a ev gwin ha bier
Ha me paour kaezh soudard ev dour deus ar rinier

Letanant kabiten a gousk war ar pluñv fin
Ha me paour kaezh soudard a gousk war an douar yen

Me 'm boa un ostizez he doa ma c'helennet
Laerezh arc'hant d'ar batñi ha dizertiñ ganti

Pa oan o tizertiñ, o tizertiñ ganti
Kentañ den rañkontren a oa ma c'habiten

Me o tapout ma fuzuilh hag ivez ma sabrenn
Kentañ taol a skoenn, lazhen ma c'habiten

Setu me kondaonet da vezañ fuzuilhet
Ur mouchoer go'll seiz gwenn dre ma daoulagad mouchet

Tri a denne barzh 'm fenn, tri all en em c'halon
Kentañ den a denne oa ma brasañ mignon

*Autrefois quand j'étais petit, petit dans la maison de mon père
J'étais un enfant, un enfant bien élevé*

*Quand je fus arrivé en âge de tirer au sort
Me voilà parti pour commencer mon service militaire*

*Le lieutenant-capitaine mange le pain blanc
Et moi pauvre soldat, je mange le pain de son*

*Le lieutenant-capitaine boit du vin et de la bière
Et moi pauvre soldat, je bois l'eau de la rivière*

*Le lieutenant-capitaine dort dans la plume fine
Et moi pauvre soldat, je dors sur la terre froide*

*J'avais une hôtesse qui m'avait dit
De voler l'argent de la patrie et de désertier avec elle*

*Quand j'ai déserté, j'ai déserté avec elle
La première personne que je rencontraï fut mon capitaine*

*Je pris mon fusil ainsi que mon sabre
Le premier coup j'ai porté, j'ai tué mon capitaine*

*Me voilà condamné à être fusillé
Un mouchoir de soie blanche pour me bander les yeux*

*Trois me visèrent la tête, trois autres le coeur
Le premier qui tira était mon meilleur ami*